

## KARANTE AR VRETONED EVID HO BRO.

Ton : *Ann hini goz.*

Ma c'halon zo  
Gant ma Bro ,  
Ho ! ia , ha bepret vo !

Hag ec'h afenn da benn ar bed ,  
Gant Breiz ma c'halon vo bepred.

Ann heol , gwir eo , a wel broio  
El lec'h zo muioc'h a vado.

Enn Pariz traou brav a weler ,  
Dre oll enon traou brav ha kaer.

Mesk ar Zozon onn bet ive :  
Ni zo paour kichen ar re-ze.

Er broio-ze , daoust d'he ken kaer ,  
Bepret ma c'halon oa er ger.

Bete Rom am euz baleet  
Ha Breiz n'am euz ket ankoact.

Ma daoulagad a glaske lann ,  
Gargal glaz ha bleun ar baelan.

Ne welenn ken ar c'haer brago  
En deuz miret d'imp hon tado.

Klevenn ken ar gontadenno  
A lar d'imb enn Breiz hon mammo.

Me bet d'in gwelet war ar mor  
Ar vag goz gand he gwel digor.

Ha kousket didan ar gwe glaz  
En deuz bet ma disheoliet c'hoaz.

Bete ma huanad divean  
E Breiz e chominn mar gallann.

Me feil d'in bevan ti ma zad ,  
Enon hep ken e vinn ervad ;

Bean enn Breiz-Izel beiet  
Ha kichen ma mamm baour laket.